

CHANSON AR PEDER VESTREZ.

Var un ton neve.

D'AR reb a so bet ganet en ur blandeden galet,
Oll o demarchou guella so demarchou collet;
Ha c'hoas mar deu dre chanch cavet tam plijadur,
Die un nombr a zisgraçou o pêo gant uzur.

*

Evit prouvi va dessin, na ranqin get furchal
Archivou ar baros-mâ n'hac ar barossiou al :
Na meus nemet teurel ur zel varnonme va-unan,
Ha demeus ar virione me a rai preuv hep poan.

*

Un detaill sclêr ha sincer demeus ar maleuriou
A zo aruet genén e cals eus a vroyou,
A zisqo da beb-unan, hac a brouvo certain
Pegen trist eo an etat eus ar guel blandeden.

*

E zàn eta da gomanç an etat truezus
Demeus va chanch dinatur, va bue malheurus :

Selaouit ta, tud yaouanq, ha mar qeret divoal,
Marteze c'houi brofito a valeuriou te all.

*

Dioüialit eus au an amcur, ennes ar pen genta
Demeus an oll-disgraçou ameus bet er bed-mâ;
Poan memes ra din sojal en angen diremet
A meus bet var an douar o veza re garet.

*

Peder Vestres a meus bet : unan en Ameriq,
Ha diou ebars en Europ, hac un all en Afriq;
Ar guenta voa hanvet Gato, an eil Genovesa,
An deirvet voa Pelaji, ar bedervet Anna.

*

Ne voan nemet pemzec vloas pa gomancis genta
Mont da velet Cataouic ha d'e zarempreda;
Maccarien, e voan caret, a gemense voan sur,
Nonobstant d'hon amitie, n'or boa tam plijadur.

*

Ma aboster am dalc'he dre ma voan re yaouanq,
N'ellen na comz, na qerzet, nonobstant d'am oll c'hoant;
En eur memes stat e veve an objet a garien,
Hon huanadou a iê hon oll antretien.

*

N'o pa zec mize voan bet en eun evelep poaniou,
Ha c'hoas e vizen chomet, daouest d'am zourmanchou,
Peneverde ma animas qerent va mestrez qer,
Hac a zifennas outi caouet comers gant gloer.

Nonobstant d'o difennou, ni n'eur gave bepret
En eur plac hor boa choazet evit en em vele;
Mes qer e voe d'ar plac'h mâ cavet fidelite,
Dre ma vije maltretet er guer pa errue

Bonjour ha joa, va mestrez, hirje penos a ret?
Petra oc'h eus a nevez? meurbet oc'h contristet!
Possub e ve ho qerent a ve qer dinatur
Da exerç en oc'h enep o maliç dreist musur!

Ya sur, va servicher, me a eprouvas dec'h
Ar valiç demeus va zad, an nerz demeus e vrec'h;
Oguen evit qementse ne roan caz ebet.
Pa meus gallet sortial e zon deut d'ho quelet.

Oc'h amitie zo fidel, me zo charmant dreisi,
Me vije em plijadur ma vijemp hep anvi;
Mes qeit a ma valéin var bave Landreguer
N'or bezo evit partach nemert poan ha mizer.

Hi, p'am glêvas, a laras evit va c'honsoli:
Remuomp ar resortchou demeus hon industri;
Marteze dre hon adres ni a denyo a ben
Da appesi o c'holer ha d'o distrei a grenn.

Hi a eure he fossubl, me eure va hini;

Nonobstant d'hon effortjou ze' gresqe hon anvi :
 Neuse e velis certen ne voa d'emp nep moyen
 Da souten ar groas ponner pini'r boa da zougen.



Neuse eta e ris ive va effort diveza,
 Ha ma sonjis e voa ret en em dispartia :
 Ogen qent evit quitat e zis da velet Catou,
 Da gonta dei va doare ebars en ber gomzou.



Na hortois nep respont a c'hinou va mestrez,
 Me a guitas anezi leun a dristidiguez ;
 An deiz varlerc'h e ris hent evit mont da Baris,
 Ec'h ma chomis var dro eur seiz pe eun eiz mis.



Ne voa netra er gær-mâ, daouest d'e oll fompou,
 A gement a zisipje en nep gis va c'hanvou ;
 Ar zonch afflijant demeus ar pezh am boa collet
 Na bermete d'am speret cavet tam joaustet.



Me receve lizeriou eus ar re douchanta,
 Hac a rê d'am c'houlion a neve divoada ;
 Erfin gement a receven demeus a nec'hamant,
 Ma sonjis mont en ur plaç all da glasq soulajamant.



An effet a heuillas va zonch, ma quitaiz va studi,
 Ha me monet d'ar Rochel vit enem ambarqi.
 Ha me mont d'ar G'holoni, da zouar Canada,

Elec'h ma ris ar rancontr eus a Genovefa.



Honnes voa ar charmanta demeus an ol merc'het
 A guement am boa biscoas var ar bed-màn guelet;
 C'hoas e remerqen enni modesti ha prudanç,
 Un antretien charmant ha cals eus a chevans.



Evit petra benaqet, nan don qet hep douti
 Ne zeus den var an douar a guement zo hep si;
 Mes ne allàn qet credi e vije em mestrez
 Nemet perfectionou ha pep seurt madelez.



Mes allas! dallidiguez eus ar speret humen!
 Me na velen qet cuzet dindan ar roz ar spern;
 Me na allen qet guelet dindan croc'hen an noan,
 An natur hac ar valiç demeus an aerouan.



Me a voe pel amaret gant al lassou trompus.
 Scoulmet gant dorn milliget an draitourez Venus;
 Me voe pel en servitud; an amzer gouscoude
 A uzas va chadennou, m'am boe va liberte.



Sortiet a esclavach, uzet va chadennou,
 Va ol occupation voa cassât va joayou;
 Mes eus en em re fiout, eur pech al am sias,
 A voa crén e ressortjou, ennes c'hoas am dallas.

Na recevis nep gouli na raje din anqen,
Ha mar boan dalc'het captif, va etat a garien;
Dindan ampir Pelaji, rouanes va c'halon,
Me receve eur joa vras ha satisfaction.

Qement am anavezze a lavare hep mar :
Ema eo chansussa den a so var an douar,
Dre ma plich da Belaji, fleuren an ol merc'het,
Un exempl a vodesti, gant an ol admiret.

Me va-unan a sonje penos en devoa grêt
Ar rod, a fortun un dro benaqet em andret ;
Mes depordet un nebeut qent col patientet,
Hac e cléfet e voamp êt pella mellemp monet.

Fixet voe guenemp an deis evit accomplissa
Ar bromesse hor boa grêt evit enem unissa ;
Mes me yas da chaseal un devez d'eur forest,
Elec'h ma eruas guenen un accidant funest.

Me racontras dec sovach, tud' ar re uzussa,
Hac en sur stringjont varnon en avis va laza ;
Mes Doue ol-buissant, mad en andret an ol,
Demeus o dorn redoutabl a aretas an tol.

Va liberte gouscoude diguenén a lemjont,

Hac en guiz ur c'hriminal da Vro Saoz em c'hesjont
 Adieu eta, va mestrez, adieu d'am Pelaji,
 Pa na varvis, birvigen ne varvan vit anvi.



Me laqa fin d'am histor en sort ocazion,
 Hac a ranniou d'am speret ha chagrin d'am c'halon,
 Mes c'hoas e teu din zontch deus va douciq Anna,
 A b'ini e comzin deoc'h qent evit finissa.



Madou, guenet ha famill, humilite, chevanç,
 A bep amzer anezo e devoa abondanç,
 Daouest d'am indignite, bremâ ez eus tri bloa
 Deus e amitie em boa ar bortion guella.



Ebaral a rejomp on daou ha plijadur or boe
 Epad ur bloas pe ouspen, hervez hor bolonte;
 Mes androuc chanç ordinal eus va heuil pas a pas,
 Daouest d'hor fidelite, allas! hor separas.



Chetu aze, va breudeur, un darn eus va bue,
 Circonstançon a lêzan hep comz eus aneze:
 Avoalc'h e meus lavaret evit rei da breven
 Er pez e meus annoncet e pen va c'hanouen.



Guir eo simpliciteou eo certen qement-mâ,
 Me a glêfe cavet mez da zont d'o recita;
 C'hoarzit eta, mar qeret, ne vo qet hep justic;

Mes dioïaliti da goea er meme précipis.



C'houi dreist peb tra, gloer yaouanq, ho ped'an
da evessat,

Goude c'hoarzin re abret, n'o pez queuz divezat :
N'o pezet qer gant merc'het enep seurt mignonach
Qeit a ma voac'h o poursu ho studi er scolach.



C'houi a ocup ar plaçou a meus bet ocupet,
Sujet d'an occasionou o deveus va dallet :
Lest ar merc'het a goste, tachit d'en em avanç,
Pedit Doue d'o sicour, hac o pezo guel chanç.



Pedit Doue d'o sicour, hac o pezo hep mar.
Bonheur ebars er bed-mâ, hac er bed-al ar gloar,
Ha pa vezoc'h o pedi, ma zellet gant true,
Me a esper cavet c'hoas chanch ha prosperite.

F I N.

